

bremañ

remañ 8 ru Hoche Roazhon - miz C'hwevrer 90 - Nnn 101 15 lur



niveridigezh 1990
manifestadeg e Roazhon
Dazont : ur sindikad leun a startijenn !

skol Diwan Kemper



LIZHER EUS FRESNES (BRO C'HALL)

...N'anavezan ket c'hoazh dez ar prosez. Emaon o c'hortoz atav...

Klevet em eus war Radio-Bro e oan bet diennet e Kuzul melestrñ Skol Veur Roazhon II, war listennad Dazont...

Resevet em eus ar c'hentelioù kentañ evit prientiñ an DEUG brezhoneg, met n'em eus ket bet ma c'hartenn-studier c'hoazh ! N'em eus ket resevet niverenn Bremañ miz Kerzu ivez...

Ganeoc'h evit Breizh.

G. Kabon

Keneil vat,

Sed amañ va adkoumanant da "Bremañ". Plijout a ra din ar gelaouenn, ha kavout a ran anezhi talvoudus evit buhez Breizh hag he dazont.

Dreist e vije, ma vije tu da gaout ur gelaouenn sizhuniek evel-se. Daoust ha huñvreal re eo ??

A galon, Yann Talbot.

LIZHER

Kenvroad ker,

Setu ur chekenn evit koumanant "Bremañ". Ne anavezan ket anezhañ raok e welout en ur stal e Kemper pa oan du-se maredoù Nedeleg.

Petra e soñfec'h diwar-benn muioc'h a vruderez ?

Bernez ar Moulleg
MADLASTO 56A
4045 HAFRSFJORD
NORGE

PANELLOU

Lorc'h a zo ennon o vezañ o chom e Lannuon abalamour d'ar brezhoneg hag a vez kavet e pep lec'h er gêr-se ; war ar c'hirri-boutin, war banelloù an hent h.a. Met perak n'emañ ket evel-se e pep lec'h e Breizh 'ta ? Peogwir eo re goustus a-hervez. Ra goustus ma revr avat ! Daoust ha tud 'zo e Breizh ha n'o deus ket en em c'houlennet pet lur (gall) zo bet dispignet o naataat hag o'h eilec'hiañ ar panelloù 'zo bet (droug?) jivet gant SAB ? Arc'hant a-walc'h evit lakaat an holl anezho e brezhoneg sur awalc'h, ha piv a oar e pet yezh all ?!

Met gwazh a zo c'hoazh. Meizet em eus en ur vale dre Rosko gant ma zud e oa kalz a banelloù divyezhek eno - hogen ne blij ket din tamm'bet ! N'eo ket gallek ha brezhoneg a zo skrivet warne : gallek (moarvat) ha saozneg a vez lennet. Ha piv en dije kredet 'ta ; hogos pep tra a oa divyezhek, "Town Centre" hag all.

Ne blij ket din a laran, ha saoz on-me koulskoude !

Daoust hag-efi ez eo keroc'h skrivañ e yezh ar vro (brezhoneg eveljust) eget e yezhoù broioù estren eta ? Hag ez eo ! Bro ar sevenadur eo skeudenn ar Stad C'hall dre ar bed en e bezh a-hervez (hervez gouarnamant Pariz dreist-holl !) met sed 'ta ar skouer-kontrol ; kalz pouezusoc'h eo an arc'hant, anat eo.

Un dra am eus kavet plijus e Rosko evelato ; e peder yezh keltiek (nemet ar c'herneveg, yezh ar vro a zo ken tost siwazh hag ar manveg) a gaver merket war panelloù degemer ar porzh. Hogen en trede lec'h nemetken e vez kavet ar brezhoneg. Ur wezh-all e tiskouezer tud pe vro eo ar re bouezusañ, ha n'eo ket re Vreizh moarvat.

Robert BAXTER

* Kinnig a reomp d'hon lenner kas e evezhiadennoù da di-kêr Rosko.



KOUMANANTIT 150 lur ar bloaz DA V- bremañ

PENAOs HA PETRA OBER ?

Burev Europa ar Yezhoù Bihan



Setu ouzhpenn miz 'zo e oa bet skourr Breizh Burev Europa ar Yezhoù Bihan/Kenurzhlerzh Sevenadurel Breizh o c'hervel da voikotiñ niveridigezh-poblañs 1990 a grego e miz Meurzh. Menegiñ a raemp ne oa ket nac'hañ respont ar gwellañ doare da gas hor stourm da benn, evit meur a abeg :

-aes e oa d'an niverourien pe d'an tiez-ker leuniañ ar follennoù e plas ar boikotour.

-troet e oa ar stourm-se a-enep d'an tier-kêr, lakaat diaes gant ar boikot, kement hag a-enep d'an INSEE. Bremañ amañ cheñchet penn d'ar vazh ; deuet eo an tier-kêr da liammañ muioc'h a zarempredoù gant an Emsav. Kuzul Departamant Penn ar Bed, da skwer, a zo aet war raok war dachenn ar brezhoneg. N'eo ket kalz a dra c'hoazh, met un hent nevez a zo bet digoret ha n'eo ket dav stankañ anezhañ kenkent. Efedusoc'h e vefe pouezañ war an dilenniñ evit ma skoazellent ac'hanomp en hor stourm en ur ober goulennoù ouz' Pariz hag ouzh kentañ Ministr Bro C'hall.

Setu perak, ma ne savomp ket tamm ebet a-enep d'ar re a voikoto en un doare hengounel, e kinnigomp kentoc'h ur boikot a dagfe an INSEE, hag evit-se e c'hallvomp ar Vretoned d'ur boikot "falsiziuz" (gwelout da heul ar pennad "Penaos boikotiñ", a zisplego daoc'h petra ober ha pesurt hentenn heuliañ).

Pal ar boikot a zo lakaat diaes an INSEE, ha n'eo ket ar c'hummuniou. Ret eo prouiñ hag ambann ne c'hell ket an INSEE ober en un doare efedus al labour bet fiziel anni.

Setu perak e c'hallvomp an holl gevredigezhioù sevenadurel, lec'hel ha politikel e Breizh da gemer perzh er boikot, ha da gas keloù dimp. A-bouez eo evidomp kraizennañ ar c'hemennadennoù evit brudañ anezho.

A-bouez-bras eo ivez ar c'helaouiñ, koulz e diabarzh ar strolladoù, hag en diavaez, dre emvodou ha kemennadennoù.

Seul vuioch a vrud a vo gant ar boikot, seul niverusoc'h e vimp o voikotiñ, seul aesoc'h e vo deomp goulenñ ma vele taolet kont eus hor yezh gant an niveridigezh poblañs a zeu.

PENAOs BOIKOTIÑ ?

- 1 -Bez e tremeno paotr an niveridigezh d'ho kaout.
- 2 -Bez e roio daoc'h un teuliad : 1 follenn lojeiz, X follenn hiniennel.
- 3 -Lavarit e leunioch an teuliad hoc'h unan ha kasit ar paotr er-maez, en ur gemenn dezhañ tremen diwezhatoc'h.
- 4 -Ne glasko ket ar paotr chom da c'hortoz. Ma rafe koulskoude, skarzhit anezhañ (en ur chom seven memestra !).
- 5 -Daoc'h-c'hwil emañ bremañ da c'hoari ganti ; meur a dra z'eus tu da ober :

A Enskrivañ tud ouzhpenn. Arabat skrivañ forzh petra na bezañ digredus. Diwallit ; ret eo goulenñ kement a foliennoù hiniennel hag a dud ho peus raksoñjet enskrivañ (e kêrioù bras e c'hell an doare-mañ bezañ an hini efedusañ).

B Respont en un doare faltaziuz d'ar goulennoù savet diwar ho lojeiz, ho puhez, ho labour.

C Tu 'zo ivez da respont e brezhoneg.

D Tu zo da veskañ A,B,C ...

E Tu zo da vezañ niverennet e meur a lec'h.

F Bez e c'hellit begpred nac'hañ respont (Met a-enep da Interestoù kumunioù Breizh e ya saurt boikot). Adkaset neuze hoc'h-unan ho follennoù d'an IT-Kêr, ha pa dremeno an niverour, leunig c'hwil hoc'h-unan ar follenn e vez skrivet enni perak ho peus nac'het respont.

6 -Pa dremeno an niverour en-dro, roit an teuliad (nemet tud o dele graet hervez F).

7 -Ma vez remerket gant an niverour ho peus skrivet traoù faos, ha ma tremen en-dro, krogit en-dro, ken lies gwech ha ma vo ezhomme.

8 -E 1992, ne oa bet gourdrouzet na kaset dirak al lazvarn hini ebet eus ar voikotourien.


Ma sav kudennoù, kelaout Burev Europa diouzhtu !

16 straed Paul Borossi 29000 KEMPER Pg. 98.55.76.16

ENKLASK AN INSEE AR BREZHONEG, YEZH AR BLIJADUR HAG AR VRO

Loeiz Laurent, rener an INSEE e Breizh, en deus kinniget d'an 29 a viz Genver e Roazhon, un enklask en deus lakaet sevel diwar-benn emzalc'h an dud e-keñver ar brezhoneg. Pedet e oa bet ar strolladoù o deus goulennet e vefe lakaet goulennoù diwar-benn ar brezhoneg en niveridigezh. "Pep hini a c'hell lenn disoc'hoù an enklask gant e zaoulagad dezhañ e-unan" eme Loeiz Laurent, "met ur skeudenn liesseurt ha dudius a zo bet diskouezet deomp. Talvoudus eo evit ar re a zo o stourm da zifenn ar yezh".

An enklask-se, diwar-benn emzalc'h an dud e keñver ar brezhoneg, a zo bet graet en-sell da brientiñ ur goulennadeg ledanoc'h evit gouzout piv ha pet a dud a gomz pe a anavez ar yezh.



39 GENDIVIZ

"N'eus ket ur respont resis d'ar goulenn : 'piv a oar brezhoneg ?' " a zisklar Loeiz Laurent. "A-wechoù ne oar ket an nen e-unan e oar brezhoneg". Abalamour da-se, hervez rener an INSEE, ne vefe ket bet gwall sur nebeut goulennoù eeun diwar-benn ar yezh pe ar yezhoù komzet gant pep hini. Kavet eo bet gwelloc'h eta, sevel un enklask resis ha donoc'h diwar-benn an danvez-se.

Evit sevel ur goulennadeg avat, e ranker da gentañ anaout emzalc'h an dud. 39 gendiviz a zo bet graet evit-se gant ar gompagnunezh marketing Maryonnie DAGNET Roazhon.

Hep "Ar Falz", avat, he deus skrivet da **Beregovoy**, ne vefe ket bet boulc'het ar studiadenn-se. Ministr ar yalc'h eo an deus goulennet ouzh an INSEE lakaat al labour war ar stern evit ma vefe enklazet ar goulennadeg diwar-benn ar brezhoneg e-barzh roll an "enklaskoù ref" evit ar bloavezh 1991.

Tud a bep seurt a gaver e-touez an 39 a zo bet interviewet : labourerien douar (6), micherourien (3), artizaned (4), ur medisin, ur c'helennner, daou skolaer, un noter, un teknisian, un nebeut implijdi burev dezho micheroù liesseurt, hag all... ha betek ur produktour abadennoù brezhoneg hag un objektour a goustiañs I E Breizh-lzel en-dro da **Bloneour-Lanvern**, 9 e **Kerne** e **Lokournan**, 9 e **Treger** e-kichen **Ploared**, 9 e **Bro-Wened** e **Bubri** ha tro-dro, ha tri e **Breizh-Uhel**.

DISOC'HOU

39 den interviewet

DISOC'HOU TALVOUDUS

Nebeutoc'h eget ur c'hard eus ar re a zo ganet en ur vro vrezhoneger n'o deus desket tamm brezhoneg ebet (8 diwar 33). Met n'eo a brezhoneg yezh-vamm nemet un hanterenn vihan (15 diwar 33). Ur yezh desket diwezhatoc'h ez eo evit ul lodenn vat eus an dud (10). Skolidi eus ar **Maghreb** o deus diskouezet bezañ dedennet gant ar brezhoneg. Liesseurt kenañ eo eta an doare m'eo anavezet hor yezh.

Diskouezet a ra an enklask, ur wech ouzhpenn, penaos eo bet strouset ar vugale pa z'int bet rediet da gomz gallek er skol. Diouzh un tu all, pa veze komzet gallek er gêr, goude ar brezel diwezhañ e oa an en-dro pe mare ar vakansoù ; da skouer e ti ar vammgozh, an doare evit ar re yaouank da zeskñ brezhoneg evel un oil yezh.

Darn eus an dud o deus desket brezhoneg er skol pe gant levrion. Met digalonekaet int bet peogwir e oa re bell gavant ket en-dro dezho tud a gomz ganto : "ret eo kaout tro da implij ar yezh evit kenderc'hel da zeskñ anezhi. Ne oan ket tomm a-walc'h ouzh ar brezhoneg evit hen deskiñ dre spered-stourm nemelken".

AR BLIJADUR DA GOMZ BREZHONEG

Kalz eus ar re 'zo bet goulennadet a lavar ez eo ar brezhoneg ur blijadur evito : "vad a ra komz brezhoneg, muioc'h en hon aes omp, lavarout a reomp an traoù e-giz a rankomp... n'eo ket memestra e gallek". Ar re o deus ranket divroañ ha dilezel ar brezhoneg, o deus kavet diaes : "e Paris, er penn kentañ en em gavemp etre Bretoned... Evit ar blijadur e komzemp brezhoneg etrezomp".

Ar re n'anavezent ket ar yezh a zo bet ret dezho deskiñ evit kemer perzh e buhez ar vro ha bazañ degemaret gwelloc'h gant ar re all : "ne oa ket evit ar blijadur da gomz ur yezh kentoc'h eget un all, met evit ar blijadur da gomz gant an den-mañ-den en e yezh c'hindik". Kompren brezhoneg, evit tud a-ziaevaz, a zo un doare d'en em ziazezañ gwelloc'h er vro. Un den a vro c'hallio zo bet souzhet, divroet da Vreizh-lzel, o wetel an holl o komz brezhoneg en-dro dezhañ. Evit kalz micherioù, medisin, implijdi bank, mentonier ez eo aesoc'h gouzout brezhoneg.

AMZER DA ZONT AR YEZH

N'eo ket gwall splann amzer da-zont ar yezh evit kalz a dud. Reoù zo a gred e oa tonket d'ar brezhoneg mont da get evit kas ar vro war-raok. Reoù all a soñj e oa ur fazi diskar ar brezhoneg met ez eo re ziwzhat bremañ evit dont an-dro. Gwelloc'h e kavont deskiñ saozneg, ha "forzh penaos n'eo ket ar gallek yezh an dazont kennebeut". Kalz a chom stag ouzh ar brezhoneg peogwir ez int bretoned, pe e vellent brezhonegerien : "ne vo ket lezet ar brezhoneg da vont da goll memestra. Bretoned omp, fellout a ra deomp derc'hel hor yezh" ; pe ne vellent ket brezhonegerien : "ur bersonelezh breizhek a zo deomp, arabat he c'holl".

Kalz eus an dud a gav gwelloc'h lakaat deskiñ danveziou "talvoudusoc'h".

d'o bugale er skol, zoken m'o deus keuz o wetel ur yezh o vont da get. Ur skolaer a soñj dezhañ ne vo ar brezhoneg, hiziviken, nemet ur yezh intelektualed.

Liesseurt eo an emzalc'hioù : an darn vrasañ a zo a-du gant ar brezhoneg, met ne rfont netra evit difenn anezhañ. Un nebeut a gav dezho eo ret mont war-du ur yezh nemelken ar bed ha reoù all, ar c'hanol, a zo a-du gant lieselezh ar yezhoù ha sevenadurioù hag a stourm evit ur gevredigezh brezhoneger. N'eo ket an enklask-se a roio respontoù sklaer diwar-benn da-zont ar yezh, met talvoudus e c'hall bezañ d'ar re a fell termeniñ ur bolitikezh er c'heñver-se.



Loeiz Laurent, rener an INSEE (an eil war an tu kleiz)

MANIFESTADEG E ROAZHON

galv UGB/CUAB



MANIFESTIN EVIT BREIZH ADUNANAET

Manifestet e vo gant kirri-tan adarre evit goulnenn adunanidigezh Breizh, d'ar Sadorn 17 a viz Meurzh. E Roazhon e vo graet an abadenn an taol-mañ, tre da goulz kendalc'h bras ar P.S., hervez galv CUAB hag UGB.

Goulnennet e vo : ma vo adunanaet Breizh, hervez promesaou 1980 an danvez-prezidant Mitterand ; ma vo lakat ar brezhoneg en Deskadurezh da vat, dre grouñ postou er c'hentañ hag en eil derez, ha dre stummañ skolaerien ha kelennerien ; ma vo doujet d'ar brezhoneg en niveridigezh-poblañs.

Da 3 eur eta, d'ar Sadorn 17 a viz Meurzh, en em gavo ar vaniferstien etal Skol Veur Beauville, war hent Pariz (ball ar Jeneral Leclerc), gant o gitionioù hag o c'hirri.

Kaoz 'zo da sevel manifestadegoù all : e Naoned, e miz Ebrel dirak FR3, hag er Redon d'an 13 a viz Here.

LIZHER U.G.B.

E bodadeg Redon, d'an 13 a viz Genver 1990, lech ma oa bet pedet da zont an Emsav a-bezh, e oa bet divizet kenderc'hel gant ar stourm evit ar

brezhoneg hag adunanidigezh melestradurel Breizh : 1- war du an dilennid hag ar pennoù ekonomikel ; 2- war du ar galloud : ar gouarnamant ha F.Mitterand ; 3- manifestin hep ehan war an dachenn.

1 MANIFESTADEG VRAS gant kirri, e ROAZHON, d'ar SADORN 17 A VIZ MEURZH 90, da gefiver kendalc'h ar P.S., diwar-benn : -adunanidigezh Breizh ha promesaou Mitterand ; -ar brezhoneg en deskadurezh ; -kudennoù ar postou ha stummadur ar vistri-skol dreist-holl ; -an niveridigezh da zont hag ar vrezhonegerien.

2- Ur vanifestadeg lechel a vo ivez e Naoned, e miz Ebrel, dirak FR3, savet gant tud ar c'huab (o chomlec'h : 12, straed al Louarned, 44000 Naoned).

3- Manifestadeg vras, erfin, e Redon, e miz Here 90, moarvat d'an 13. Keleier a vo kaset deoc'h diwezhatoc'h diwar he fenn.

UGB -An Douarenn- 21 straed an Tier-Barn 56000 GWENED



Roazon, prezidant Kuzul "Rannvro Breizh".

Kasit ar c'heloù d'hoc'h izili, da lakaat anezho da zont da vanifestin d'ar 17/03. Deuit niverus, gant panelloù ha gitionioù war an temoù meneged amañ a-us. Goulnennet e vez, evit ur wech, gant ar strolladoù politikel, chom hep implij o "ardivinkoù" boaz, gant anvioù ar strolladoù, evit ma ne vefe ket tu da rebec'h deomp sevel ur vanifestadeg a-enep d'ar PS, ar pezh ne vo ket. Gant tud ar galloud eo e vo goulnennet sevenañ o fomesaou ha reiñ ur plas dereat d'ar brezhoneg en Deskadurezh hag er gevredigezh.

Evit sevel manifestadeg Naoned hor boa goulnennet un tamm skoazel gant an holl gevredigezhioù. Div hepken o deus kaset 200 lur pep hini, daou gelc'h sevenadurel : hini Sant Nazer hag hini Gwened. Trugarez dezho. Tost 4 000 lur zo bet dispignet ganeomp. Ma vo kaset deomp 100 lur gant pep kevredigezh ne vo kudenñ argant ebet evit sevel manifestadeg miz Meurzh. Bennozh d'ar re a raio en a-raok.


2- Ur vanifestadeg lechel a vo ivez e Naoned, e miz Ebrel, dirak FR3, savet gant tud ar c'huab (o chomlec'h : 12, straed al Louarned, 44000 Naoned).

3- Manifestadeg vras, erfin, e Redon, e miz Here 90, moarvat d'an 13. Keleier a vo kaset deoc'h diwezhatoc'h diwar he fenn.

UGB -An Douarenn- 21 straed an Tier-Barn 56000 GWENED

DAZONT

Unvaniezh Studieren Breizh



Unvaniezh Studieren Breizh (USB) a stourme warlene evit an DEUG Brezhoneg gant Unvaniezh ar Kelennerien Brezhoneg ha Stourm ar Brezhoneg. Aotreet eo bet an DEUG e 1989. Abaoe eo bet staget anv DAZONT ouzh hini USB.

Pal DAZONT-USB a zo bezañ ur sindikad pouezus e skolioù-meur Breizh.

Ma 'peus bet tro da dramen dre Skol-Veur Roazon II, ho peus gwelet, sur awalc'h, pegou-sun "DAZONT Union des Etudiants de Bretagne" un tammig e pep lec'h ouz ar mojerioù. Marteze ho peus bet ivez unan eus ar 24000 a draktoù ingalet gant studieren USB.

UR SINDIKAD BROADELOUR.

Ur sindikad broadelour eo DAZONT (Unvaniezh Studieren Breizh). E bal a zo bodañ ar muiañ a studieren ar gwellañ evit tommañ anezho ouz broadelezh Breizh. (E giz sindikadoù Bro-Gorsika).

Disheñvel diouz sindikadoù all skolioù-meur Breizh eo DAZONT USB.

- Ne resev urzh ebet digant sindikadoù Pariz. Distag eo diouz ar strolladoù politikel ivez. Labourat a ra evit studieren Breizh, hag int eo a ziviz pe stourmoù kas war-raok.

- Gant ar mennozhioù diazez-se e c'hell USB stourm evit dazont ar skolioù-meur e Breizh.

->Labourat a ra evit digreizennañ ar galloud-divizout e skolioù-meur Breizh.

->Goulnennet a ra e vefe ur c'helennañ diwar-benn Breizh er skolioù-meur.

->Skolioù-meur al Liger Atlantel a die bezañ stag ouz akademiezh Breizh.

- Stourm a ra a-enep an diforc'hioù-gopr a zo etre skolioù-meur Pariz (5% a-us da well-wazh goprou ar skolioù-meur war douarou stad Bro-C'hall e keñver o stern) ha re Vreizh (10% dindan ar memes well-wazh !)

- Labourat a ra war holl gudennoù ekonomikel, sevenadurel, pe sokial e skolioù-meur Breizh.

- Ur gazetenn he deus DAZONT-USB, "Karnach" hec'h anv. Servijout a ra da vrudañ mennozhioù an unvaniezh.

POUEZ DAZONT USB E SKOL-VEUR ROAZHON II

Gwelet ha klevet eo bet USB e Skol-Veur Roazon II abaoe derou ar bloavezh-stud.

Aozet he doa ur vanifestadeg da zevzhañ ofisiel brasadur ar Skol-Veur. Na bolitikerien Roazon, na Brezidant ar Skol-Veur n'o deus gallet komz gant trouz ar vanifestadeg.

Gant ar savadurioù nevez e c'hell ar Skol-Veur degemer 7000 studier war ar 14000 a zo enskrivet. Goulnennet a ra USB muioc'h a archant evit ar skolioù-meur ha digreizennañ anezho.

AN DILENNADEGOU DIWEZHAÑ.

Pouez DAZONT USB en deus souezhat ar sindikadoù all gant an dilennadegoù diwezhañ. Pemp den eus listenn DAZONT a zo bet dilennet e tri c'huzul ar Skol-Veur. Daou e c'huzul melestradurel (14,2% aus ar mouezhioù), kuzul pouezusañ ar Skol-Veur : Gilbert Cabon ha Riwall Ar Mann, diwar an 10 studier dilennet. Daou e c'huzul pedagogel (14,4%), diwar 11 studier dilennet : Jean-Michel Roynard ha Sylvain Botrel. Unan e c'huzul skiantel (45,5%) diwar 3 studier dilennet : Alan Botrel.

Eil sindikad ar Skol-Veur eo deuet Dazont USB da vezañ e-keñver niver an dileuridi e kuzuloù ar Skol-Veur hag evit niver ar studieren sindiket. Warlerc'h an UNEF-ID met arak an AGEUR UNEF ha listennoù an tu dehoù (UNI ha GUD).

War listenn ar c'huzul melestradurel eo bet dilennet Gilbert Cabon. En toull-bach amañ evel ma ouzoc'h. Nach a ra komz en ur yezh all estreget brezhoneg, ha n'eo ket bet dieubet e-giz Jean Yves

Meudeg (en deus komzet e galleg gant ar barner). Displeget eo bet an dra-se war 5000 trakt ingalet er Skol-Veur arak an dilennadeg.

Gilbert Cabon a zo studier hag un arouez eo e emzalc'h e-keñver ar brezhoneg. Setu perak eo bet kinniget e penn hol listenn evit ar c'huzul melestradurel. Ma n'hell ket dont da Vreizh da emvoudoù ar C'huzul e vo votet en e anv dre brokul.

An dilennadeg-se a zo bet heuliet mat gant ar gazetennerien e Breizh hag e Bro-C'hall. Komennet eo bet ar c'heloù-se war FR3, AFP, France-Info, Ouest-France, le Télégramme, Libération, Le Monde, Radio Breizh Izel, Radio Arvorig, Bremañ hag Emgann. Kaset eo bet gant USB ar c'heloù-se da gazetennerien broioù all er bed.

Kregiñ a ra DAZONT USB da vodañ studieren all e Roazon I, Naoned hag e Brest.

E Dazont ez eo bet krouet ivez un unvaniezh breizhat evit ar skolioù bras.

Un trede strollad a zo e dazont : Unvaniezh Liseidi Breizh. Dilauridi a zo er sindikad-se gant liseidi Roazon, Kemper, Naoned ha Bro-Dreger e Breizh hag unan evit liseidi breizhat Pariz.

Brasaat a ra strolladoù DAZONT ha kalonekaus eo labourat evito. Met labour a zo da ober c'hoazh evit bezañ ar sindikadoù kreñvañ e kement lise, skol-veur pe skol-vras a zo e Breizh.

Riwall Ar Mann

36-15

KELAOUENN
Kuzulenn dilennadeg brezhoneg - galleg

TC / KELA

- Keleier ar vras
- Gouelioù, Festoù nos ...
- Lerc'hioù nevez embannet
- Skol Ulhei Ar Vro
- C'Hoarioù

SKOL GEMPER

ouzhpenn 60 bugel

Chomlec'h : straed Paul Borossi
29000 KEMPER

Niver a skoldi : 62

Niver a familhoù : 32

Niver a skolaerien : 4


Niver a implijdi all : 2 (skoazellerezh
er skol-vamm, + diwallerezh, kantiin...)

ISTOR AR SKOL

E 1977 e oa bet digoret ur skol Diwan e Bro Gerne, e Sant Evarzeg. Ur skol-vamm gant seizh bugel e oa houmañ. Da **Blovelh** eo aet ar skol d'en em staliañ e 1978. Chomet eo du-se e-pad pevar bloaz. Kresket eo an niver a skoldi ha neuze eo bet kemeret un eil skolaer. E 1981 zo bet klasket digeriñ ur c'hlas kentañ-derezh. E-diabarzh skol Diwan **Pont'n Abad** eo bet staliet a-benn ar fin, gant ur skoliadez eus skol Diwan **Plovelh** ha d'abou eus skol Diwan **Pont'n Abad**. E Gwengolo 1982 eo deuet ar c'hentañ-derezh da **Blovelh**. An tiskol, deuet da vezañ re vihan evit 3 skolaer ha 25 skoliad, e oa dav sonjal dilojañ, ur wech all c'hoazh. Setu ar pezh 'zo bet graet e-kreiz ar bloavezh-skol 82-83, evit mont da **Gemper**, da karter **Penharz**. Tri skolaer, div sal nemetken er penn-kentañ, mui ur c'hanin, setu stad ar skol e 1982. Hiziv ez eus 4 skolaer o labourat, pep hini en ur sal, gant 62 skoliad. War gresk ez a an traoù. Met hiziv c'hoazh eo re strizh ar skol ! C'hoant dilojañ hon eus c'hoazh, evit mont d'ur skol vrasoc'h, gant muioc'h a salioù, ur porzh-skol plijusoc'h, ur sal-debriñ staliet gwelloc'h... Met diaes e vo lakaat tud ti-kêr Kemper da reiñ deomp ur sal all, ha koulskoude n'eo ket ar plas a vank e lec'hioù 'zo. Ar c'hoant da sikour hor skol ne lavaran ket..

BUHEZ AR SKOL EVIT 1990


Ur raktres obererezh desavadurel a zo bet savet etre ar 4 skolaer evit holl skoldi Diwan Kemper : istor Kemper, hec'h ekonomiezh hag hec'h endro. Savet e vo gant ar skoldi ur vaketenn o tiskouez Kêr Kemper war-dro ar bloavezhioù 1700, ur film video o



Evel bep bloaz e yelo skoldi ar c'hentañ derezh da dremen ur sizhunvez en diavaez eus ar skol. Ar bloaz-mañ e yaint sur a-walc'h da **Sant-Tos**, e kreizenn an **ULAMIR**, evit studiañ buhez ar broc'hed, ar c'hoadoù... hag evit ober un tamm sport (krapat, ha tennañ gant ar wareg).

Abaoe penn kentañ ar bloavezh-skol-mañ e c'hell skoldi ar c'hlasoù 3, 4, 5 (CE2, CM1, CM2) heuliañ un hanter- eurvezh saozneg bemdez. Ne


tiskouez roudoù amzer-dremenet Kemper, plan ar gêr gant fotoioù eus lod eus he stalioù-labour. Feilhañserezhioù Kemper a vo studiet ivez dre ma vo lidet o 300vet deiz-ha bloaz ar bloaz-mañ. Ar re vitanañ a savo ur vaketenn a ziskouez an Odet (mammenn, hent, peskad...). Mont a raint d'ober pourmenadennoù war vord an Odet. Lakaat a raint un akwarium en o c'hlas gant loened ar stêrioù. Al labourioù savet a vo diskouezet er skol hag en diavaez eus ar skol.



SKOL GEMPER

deskadurezh

LEZVARN : AR STAD KONDAONET.



vez ket goulnet ganto komz mel lakot e vezont da salaou enrolladennoù graet gant saoznegerien a-vihanik, ar pezh zo a-bouez-bras evito da bakañ ur yezh reizh hag an taol-mouezh mat. (Hentenn heuliet gant gallegerien 'zo er

C'hanada.) Evit gouzout hiroc'h, pellgomzit d'ar skol.

Skolaerien : Yann GUILLAMOT,
Eilane KERJOAN, Marivon LE BERRE
hag Anna Vari AR ROUZ.
98 55 20 98


Un trec'h bihan eo bet evit "Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg" barnidigezh ar 27 a viz Kerzu gant Lezvarn Melestradurezhel Roazhon, pa z'eo bet kondaonet ganti enseller akademiezh Il-ha-Gwilin.

Goude ma oa bet respont ebet eta gant an enseller d'he lizher kaset d'ar 27 a viz Kerzu 1986 (!), diwar-benn ar c'hentelioù brezhonek a oa bet ehanet e skol-vamm ar "Faux-Pont" a Roazhon, a voe savet gant UGB ur reked diouzh al lez-varn d'ar 24 a viz Mezheven 1987 (!). Tri bloaz eta etre ar c'hlemm hag ar varn !

Mar d'eo bet meneget gant ar varnerien lezenn 1951 ha hini 1975 diwar-benn ar skol vrezhonek diret eo niver uhelk ar vugale (un tamm muioc'h eget ar 15 a vez ezhomm) a zo bet diazez ar varn. Pa oa tra-walc'h a vugale, hervaz al lezennoù, a oa ret d'an enseller aozañ ar c'hlemm. Pa n'eo doa ket graet e tise bazañ kondaonet en anv "kendalc'herezh an Deskadurezh-Stad".

Gwall ziwezhat eo bet kemennet ar varn da UGB evit ma c'hallfe brudañ ervat an drec'hedennig-se er c'hazetennoù gallek. Spi a zo e c'helio servijout da zegas trec'hadennoù all, ha da rediñ ar stad da aozañ ar c'hlemm e kement lec'h ma vo goulnet kreñv a-walc'h.

Yann LESKILDRI



STAJOU WAR AN URZHIAEREZH

35000 Roazhon - Da gaout titouroù
skrivet da OSCR - X2000 - Poble
Central - 6 ball ar re Unanet - 35043
Roazhon Cedex - pell : 99-35.11.11.

Endro

GOULEIER GWENN

derc'hel daou benn ar chadenn



GWELLAET AR BED ?

Gant aes ma chomer balo'h e c'henoù dirazañ, hag e doug un nebeud bloavazhiou, pa n'eo ket un nebeud miziu, setu diluziet kudennou a hañvale bezañ rouestlet da vat, ha setu echuet gant brezelioù a veze sellet outo uhel didermen.

Arme an URSS a zo bet tennet kuit eus Bro Afghanistan, yac'haet an traoù etre Irak hag Iran, graet ez eus bet tammou bihan gant ar fuzeeñnoù Pershing ha SS20. Arsav-brezel a zo etre ar sandinistad hag ar c'h"Contre", ar "bodo" vietnamat o deus kuitaet Bro Gambia. Afrika ar Su a laosk Bro Namibia da vont war zu hec'h emrenerezh hag a venn chom hep aloubiñ ken Bro Angola dieubet war un dro diouzh dalc'h Bro Guba. Moger Berlin a zo aet da dammou. Arliou ar peoc'h a greder gwelout etre Israeliz ha Palestiniz, etre strolladoù Bro Liban ha betek e bed dizanant an apartheid. Ha neuze, ha daoust ma tiroll c'hoazh tan ar brezel e meur a lec'h evel e Sri-Lanka pe er Salvador, "daoust ha gwelloc'h e vefe deuet hor bed da vezañ a daol trumm ?(1)". Ha dizoloiñ en dije graet, evel dre vuzhuz, perzhioù dibar an emglev hag ar peoc'h ?

Ha ma vefe abegoù disheñvel mat da seurt emdroadur ? Ha ma tiskouezfe hepken an arsaviou-se, arsaviou da reuzioù ha foarioù ar brezel hag ar spont, emañ ar metoù stadal soudardel, penn-abeg d'ar pep brasañ eus enkadennou hag ar brezelioù, o kregiñ da goll un tamm eus e bouez e mont en dro hor planedenn ?

Ha ma tiskouezfe hepken ez eus kudennou all, pouezusoc'h o tont war-c'horre, daoust ma n'int ket aes da veizañ en un doare anat evit c'hoazh.

RISKLOU NEVEZ

Ken frealzus ez eo gwelout kement a c'houleier gwer oc'h enaouiñ war un dro, met ken ankenius all ez eo gouzout ez eus gouleier all o trenn da ruz war ar memes tro ha nehusoc'h un tamm mat anezho (2). Riskioù bras ha nevez a bouez war ar bed hag a sko war un dro ouzh endro sokial hag ouzh endro naturel an den. En arvar e lakaont koulz darempredoù an dud kenetrezo hag an darempredoù o deus an dud gant o endro ekoigegel emañ ar vuhez stag outañ.

Diouzh un tu : deoù divent broioù an Trede Bed, enkadennou sokial bannieloù "kerioù an islonk"(3), skarnilec'hañ katz a yaouankizoù dre ar bed a-bezh, araokadennou fonnus ar baourentez kozh ha nevez, dismantrou an dram, ha diouzh an tu all : saotradur aergelc'h uhel an Douar, marv ar c'hoadeier koulz en hor broioù-ni hag er broioù trovanek, saotradur dour ar gouerioù hag an eien, reuzioù meur evel Bhopal ha Tchernobyl. Ne dro ket mat hor bed a-dra-sur ...

DAOU DU UN ENKADENN

N'eo ket hepken an "disemglevioù lec'hef" boaz a gustum kaout diskoulmoù amañ evit lesker o flas aze da zizemglevioù all war leurenn c'hoariva ar bed. Tostaat a ra an div vro

vrasañ a ren ar bed, an eil ouzh eben abaoe degadoù a vloavazhiou. Ha lidet kement-se ganto e Malta Ken aes ha tra, evel pa vefe aesoc'h en am renkañ pa ouezer bezañ divarek ha dic'houest da ziskoulmañ enkadennou meur an amzer a vremañ. Evel pa blegfent o div a-gevret dirak dazont ar bed-mañ hag a zo dizalc'hoc'h-dizalc'hañ diouzh o fennrenerezh daoubennek (4).

Ha koulskoude, aloubidigezh Panama a zo aze da zegas da soñj n'eo ket peurlvarv c'hoazh loen ar soudardelezh. Met ar Stadoù Unanet n'int ket gouest ken d'an em c'houestlañ e brezelioù evel hini ar Vietnam. Bez o deus da gas en-dro "brezel an dram"(5), ar brezel emzifenn, diazezet da gantañ er gevredigezh amerikan, deuet da vezañ supermarc'had an dic'hoanag.

Diouzh he zu, URSS Mikhaïl GORBATCHEV, ma kar mont betek penn ar Perestroïka, ne c'hell ket chom hep adselout ouzh he statud a vro holl c'halloudek nag ouzh ar mont en-dro koustus a ya d'e heul.

CHEVARNADZE, ministr an aferioù diavaez, a ziskouez bezañ komprenet kement-se. Un disliavar anat a vefe etre goulennoù Moskov da renkañ mell ti Europa hag ur raktres soviedel bedelour diazezet war Vladivostok, Aden, ha lec'hioù all n'he deus Europa tra ebet da welout ganto.

E Bro-Bologn, en Hungaria, koulz hag e pep lec'h bremañ e retar Europa, ez eo deuet mare ar selioù diframmus war mont en-dro ar bed kozh. Ken ez eo statud bedel an "tu" soviedel a zo en arvar, hag ouzh e heul diazezoù pennrenerezh daoubennek hor bed ha neuze ivez war verr dermen acrouniezh an Amerikaned er C'hornog.

Na pegen uhel e vefe savet youc'hadegoù an trec'h m'he dije larzhed enkadenn stadou Europa un ugent vloaz 'zo, d'ur poent m'evado ar C'hornog ken asur diouzh e hent ha diouzh e zoareoù disi.

Met chom a reer kentoc'h sellus en e gomzoù hiriv ...

Ar C'hornog hag a chom e c'henoù digor war nav eur hanter ha sell gant e zaoulagad disporballeit ouzh dismantr diabarzh ar chevrudigezhioù kumunour, ez eus anezhañ ur C'hornog gwanaet, distabiataet ha douatahs ennañ diwar e-benn e-unan.

FOLLENN AN ANNEZ

MOULADUR NIVERENN

1 **Da leunian** evit an holl annez **implijet pe goullo**

Cadre à remplir par l'agent recenseur

Numéro du district de recensement

Rang de l'immeuble dans le district

Rang du logement dans l'immeuble

Cachet de la mairie

NIVERIDIGEZH

POBLANS

1990

BRO FRANS

leuniañ ar peder fajenn en un doare lennus

1 ANV, ANV BIHAN

2 CHOMLEC'H

Straed

Kumun

Departamant

3 PLAS AN ANNEZ EN TI (MAZ EUS MUIOC'H A ZAOU ANNEZ EN TI)

a. Skalier

b. estaj

c. Plas war ar bondazez

Niverenn dor an annez

4 RUMM ANNEZ

1 Ti kentan

Ur follenn hiniennel evit pep den enskrivet. (pajenn 2 (18))

2 Ti implijet a wechou

follenn hiniennel ebet.

3 Eilvet ti

follenn hiniennel ebet.

4 Ti goullo

ur follenn hiniennel evit pep den enskrivet. (p. 2 et 18)

5 Karavanenn, ti finvus

(RÉCAPITULATION GÉNÉRALE)

À remplir par l'agent recenseur		À remplir par le maître		
(5)	(6)	(7)	(8)	(9)
Nombre d'imprimés n° 2 recueillis (Note 7 seulement)	Nombre d'imprimés n° 2 supprimés (faisant double emploi avec des imprimés n° 5 réintégrés)	Nombre d'imprimés n° 2 ajoutés (bulletins reçus pour des personnes en déplacement et ne faisant pas double emploi)	Nombre d'imprimés n° 5 réintégrés	Population après réintégrations (9) = (5) - (6) + (7) + (8)
<input type="text"/>	<input type="text"/>	<input type="text"/>	<input type="text"/>	<input type="text"/>

Visa n° 30X001 EC, du ministre d'Etat, ministre de l'Economie, des Finances et du Budget. Enquête statistique obligatoire (loi n° 51-711 du 7 juin 1951 modifiée). Les questionnaires, collectés par l'intermédiaire des maires, sont exclusivement destinés à l'INSEE. Il est interdit de prêter copie du présent questionnaire sous peine des sanctions prévues à l'article 44 de la loi n° 78-17 du 6 janvier 1978. Les données anonymes résultant de l'exploitation du recensement peuvent être cédées par l'INSEE à d'autres organismes (voir notice d'information).

AN DUD A ZO O CHOM E-BARZH AN TI-ANNEZ

N'ANKOUNAC'HAIK KET AR VUGALE VIHAN

Listenn 1 AN DUD O CHOM DALC'H MAT EN TI

● Merkit amañ ar re a zo o chom en ti

● Darvoudou ispisial
- goprado lojet en ho ti
- tud all o lojan en ho ti

● Evit pep hini eus an dud merket amañ, leunian bep a fichenn

Listenn 2

TUD HO TIEGEZH O VEAÑ E KUMUNIEZHIOU

-oc'h ober o servij-soudard
-soudarded
-bugale lojet er skol
-studierien
-labourerien en oaled
-labourerien en ospital
-oaled ispisial

● Na leugnit fichenn ebet evito

Listenn 3

TUD HO TIEGEZH A ZO O CHOM EN UN TI ALL

● Merkit amañ ar re a zo
-studierien o vevañ e kêr
-bugale fiziet en unan bennak all
● Na leugnit fichenn ebet evito.

ANV FAMILH

Enskrivit war al linenn 1añ den 1añ an tiegezh, an eil war an eilvet linenn...

ANV BIAH

PARENTÉ OU RELATION avec la personne inscrite sur la 1^{re} ligne.
Indiquez par exemple : épouse (ou époux), conjoint(e), en union libre, fils, fille, père, mère, petit-fils, belle-fille, neveu... ami, pensionnaire, sous-locataire, etc

Inscrivez sur la 1^{re} ligne l'un des conjoints d'un couple ou, à défaut, l'un des adultes habitant le logement. sur la 2^e ligne, l'autre conjoint

1		
2		
3		
4		
5		
6		
7		
8		
9		
10		

S'il y a plus de 10 personnes à inscrire, utilisez une feuille de papier supplémentaire. ma vez ouzhpenn 10 den da venegiñ amañ, kemer ur follenn-anneez all.

UR SKOUER

Eman ar familh Seznec a chom e Roazon 4 bugel o deus an Aotrou Seznec hag e wreg. Unan hepken Y a vez er ger war ar sizhun. Eman mamm-gaer an Aotrou Seznec o chom ganto e pad ar bloaz. Unan eus ar mibien zo oc'h ober e servij e kraiz Bro C'hall. 1 eus ar merc'hed Gwennola, a zo chom er skolaj e Naoned. Ar merc'h all, Anaig, zo studier e Skol Veur Brest.

Listenn 1

1	SEZNEC Mickael	
2	RAOUL Soaz	Gwreg
3	SEZNEC Yann	Mab
4	QUENTREC Joséphine	Mamm-gaer

Listenn 2

1	SEZNEC Perig	Mab	Ganet d'an 21/8/89	kazarn Limoges
2	SEZNEC Gwennola	Merc'h	Ganet d'ar 7/4/78	Skolaj Lebesque Naoned
3	SEZNEC Anaig	Merc'h	Ganet d'ar 6/2/71	Skol Veur Brest

Fichenn hiniennel ebet.

ANV FAMILH hag ANV BIAH	KAR PE LIAMET	DEIZIAD HA LEC'H AR C'HANEDIGEZH	ANV HA CHOMLEC'H AR SAVADUR
1		Ganet d'...	
2		Ganet d'...	
3		Ganet d'...	

ANV FAMILH hag ANV BIAH	KAR PE LIAMET	DEIZIAD, LEC'H AR C'HANEDIGEZH	CHOMLEC'H AN TI
1		Ganet d'...	
2		Ganet d'...	

TUD O TREMEN

NA SKRIVIT NETRA

FICHENN HINIENNEL

MOULADUR NIVERENN

Skrivit sklaer tre ha sinadur dindan ar bajenn 2 (18)

Cadre à remplir par l'INSEE da vezañ leuniet gant an INSEE

Cachet de la mairie siell an ti-keñ

NIVERIDIGEZH

POBLANS

1990

BRO FRANS

2

1 ANV, ANV BIHAN

2 CHOMLEC'H

3 REIZH

Gourel 1
Gwregel 2

4 STAD FAMILH

Dizimez 1
Dimezet 2
Intanv 3
Dizimezet 4

5 DEIZIAD HA LEC'H AR C'HANEDIGEZH

Bet ganet d' :
Kumun
Departamant
Pe bro

6 BROAD

● Gall dre c'hanedigezh 1
● Broadet Gall 2

● Estren d'hor bro 3

7 PELEC'H EDOC'H O CHOM

d'ar c'hentan a viz gouere 1982 :
● ER MEMES ANNEZ 1
● EN UN ANNEZ ALL 2
● EN UR GUMIN ALL 2

Peseurt kumun ?
Departamant

GOULENNOU 8 DA 21 EVIT AN DUD A 14 BLOAZ HA MUIOC'H

8 SKRIVIT HO TIPLOM UHEL AÑ

- CEP 1
- BEPC 2
- CAP 3
- BEP 4
- BACC 5
- DEUG-BTS- DUT-DEST 6
- Aotreegezh pe muioch' 7

Ma ne labourit ket respont d'ar goulennoù 9 da 11

9 BEZ EZ OC'H

- Skoliad, studier 1
- Dilabour 2
- Retradad 3
- Tennet eus ho micher 4
- Gwreg en ti 5
- Dioberiant 6

10 LABOURET OC'H EUS DIJA ?

YA 1
war beseurt micher ?
NANN 1

11 KLASK A RIT UL LABOUR ?

- Ne glaskit ket 1
- Klask a rit abaoe 2
 - nebeutoc'h evit 3 miz 2
 - Etre 3 miz hag 1 bloavezh 3
 - Etre 1 ha 2 vloavezh 4
 - 2 vloavezh pe muioch' 5

Sinadur dindan pajenn 2

EVIT AN DUD O TREMEN, CHOMLEC'H AN TI BOAS

Nnn. _____ Straed _____ Kumun _____

HA GOULEIER RUZ

Endro

Daoust hag eñ ne vefe ket ul liamm, un ere hon eus poan da gaout krog ennañ choazh, etre enkadenn ar reter hag hini ar C'hornog ?

AR ROUE MARCH'AD

An iskiñ tra eo gwelout ar broioù e lec'h ma kren ar strollad-stad war e ziazezoù, diaozet a grenn war an tachennoù politikel ha sevenadurel o tegemerout ur patrom kevredigezhel, hini ar C'hornog, azeulet ganto, met war "diroer" eñ ivez, koulz er broioù kevredigezh daoudizh, enkadenn ar c'herioù, skarnil-ene ha rouestl ideologel.

E tal ouzh seurt kudennoù hag a dizh hiriv hor flanedenn en he fezh, binvioù boas ar gevredigezh etrevroadel a seblant gwali ziamzeriet (6) ha kazi diefedus (7).

Daoust hag eñ e vezo e sell ar strolladoù etrevroadel hag en o zouesk, da gentañ, kuzul surentez ar broadoù unanet, da ledanaat o barregezh en tu all d'an dizemglevioù politikel soudardel evit dont a-benn d'ouzh stummoù nevez ar reuz bras a lak en arvar kevredigezhioù hor bed ?

Gwall ziwezet ha tizolo dismantrou ar baourentez ha saotrader an en-dro an aozadurioù a gustum merrañ ekonomiezh ar bed, evel al Danvez-Moneiz Etrevroadel (FMI) pe bank ar bed.

Met poan o deus da cheñch penn d'o strategiezh pa talc'hont d'ober gant ur preder nevez-liberal.

Ha dirak ar gouleier ruz a zo en em lakaet da wilc'hata a bep tu, daoust hag eñ e vo gouest ar stadoù, kiriek sañset eus ar gevredigezh politikel etrevroadel, da gevredieñ o nerzhioù en un doare efedus ?

Kalz a dermen a zo ganto evit choazh pa reer kaoz d'en em glevet da renkañ ar gwiskad ozon a zo o vont da gel, d'leñ an trede bed pe roudadoù etrevroadel an dram.

MALL EO BEZAÑ MESTR WAR AR ROUE ANVET MARCH'AD

UN EMSKIANT HOLLVEDEL


Daoust hag eñ emañ an dazont etre daouarn penntrenerzhioù bedel nevez,

galloudoù ganto da zivizout war ar prim, pa ziskouezont distroioù-kaer evel hini burev atomek Vienna pe re an Emvod-Mour war an Antartik peseurt skolioù a gavfent war o hent ?

Ken mezhus hag arak e talc'h da vezañ avat gwallgasadennoù gwirioù mabden ha gwirioù ar pobloù. Nelson Mandela a zo bepred en toullbac'h ha danevelloù Amnesty International a zegas soñj bep bloaz eus stad arvarus un toullad a dud dizanv. Ar pobloù mapouch, palestinian, kanak, sahraoui a gendalc'h gant o stourm hag a chom evito an afer penmañ.

Met an dachenn bolitikel a rank ober hiriv gant penn kudennoù nevez, sokial hag ekologiezh war un dro, diazezet ha savet diwar hon doare-ni d'an em ziorroñ hag a lak en arvar milionoù a dud war an douar ma n'eo ket muioch' c'hoazh.

An aozadurioù politikel etrevroadel, forzh pegen mallus ez eo o c'hennerzhañ hag o adaozñ, n'hellont ket ober ken hep ar "gevredigezh sivil etrevroadel" diazezet war aozadurioù e-maez ar gouarnamantoù pe re o deus diskouezet ar startijenn a oa enno da vare kendalc'h 7 bro paourañ ar bed a zo bet dalc'het e Paris d'ar 15 a viz Gouere 1989.



"Ober war al lec'h ha kaout ur preder hollek". Ar ger-stur-se brudet er bloavezhioù 70 evit met a-enep d'un ober politikel re strizh, a zo hiziv dibaset. War al lec'h evel en un doare hollek e ranker war un dro ober ha prederiañ.

Ar youl da adsevel un endro lec'hel a zo kreñv e kement lec'h a zo, en Amazonia evel war uhelderioù Karabakh, e roudadoù kevredigezhel ar bannevioù koulz ha war an Danub iakaet en arvar abalamour d'ar stankennoù bras a glasker saval warnañ. Met pep hini a gompren hiriv e ranker, koulz er plustr hag er preder, kaout un emskiant hollvedel. Hollved gwirioù mab den gwallgaset e Tian'An Men evel e Pretoria. Hollved an ekonomiezh ledanaat d'ar bed holl hag

a zo mall bras bezañ mestr warni ha n'eo ket lesker ar roue anvet marc'had da ren warni. Hollved an endro ekologiezh en arvar bras.

"Darc'hel daou benn ar chaden" a lavare Pascal, sed aze an dalc'h kozh hag atav ken nevez.

Jill KILLEVERE

1 Rajni Kothari, Canberra Times 8 ha 9 a viz Gwengolo 1989 (stummet berraet ur studiaden bet embannet e-barzh Economic and Political Weekly, New Delhi)

2 An dielfennadur-mañ a gaver d'ja rakfretet en un eskemm-menoziou etre aozer ar pennad-mañ hag Alberto Toscano (Italia Oggi, 29 a viz Gwengolo 1989)

3 Tro-lavar Claude Bataillon in "Mexico aujourd'hui, la plus grande ville du monde" (Publi sud, Toulouse 1988)

4 En e zanevell bloaz evit 1989 "State of the world 1989" (p.20) Washington Worldwatch Institute a ra

menag eus divarvegezh anatoch-anatañ ar broioù bras da renkañ aletioù ar bed hag eus steuziadur o sistem boutin a rene warnañ.

5 "Viet-Nam or D-Day" (The Economist 9 a viz Gwengolo 1989). Marc'had ar "crack" a zo bet dielfennet gant Politis, 12 a viz Here 1989).

6 "Les nouvelles menaces générales par les problèmes de la vie moderne" setu ar c'hudennoù a glask merzout Claude Cheysson gant e aozadur : "La fondation de l'arche de la Fraternité" in Le Monde 8 a viz Du 1989.

7 Maurice Bertrand : "Des idées neuves pour assurer la sécurité mondiale", miz Mae 1989.



KELEIER

FRANKIZ BREIZH : RESPONT E BREZHONEG.

Un dra sirius eo an niveridigezh, eme **Frankiz Breizh**, ha ret eo respont e brezhoneg, nemet n'eus ket kalz a lec'h evit ober : gant kroazioù keliek marteze ?

F.O. A-ENEP D'AR BREZHONEG

P'en devoa komzet **Par Denez e Kuzul Ekonomikel ha Kevredigezhel Breizh** diwar-benn kelenn hon yezh er skolioù-stad ha diwar-benn an nebeudig amzer a vez roet dezhi er skinwel en doa respontet dezhañ dileuriad F.O. e oa a-enep "ur skoazell RE VRAS d'ar brezhoneg".

Skrivet en deus neuze **F. Le Moigne**, prezidant "Kreizenn Sevenadurel Breizh" e Sant Malo, da zileunad F.O. da lavarout dezhañ pegen saozzanet e oa bet gant seurt komzoù ha da c'houlenn digantiañ perak en doa kement a zroug ouz ar brezhoneg, pa veze allet gant yezhourien vrudet deskiñ anezhañ adalek ar skol-vamm. Hag eñ menegiñ komzoù distaget gant ar gall **Claude Hagège**, kelenn er c'h "Collège de France" : "Ma vijen Breizhad, hep mar e tibajen ar brezhoneg evit ma bugale. Adtapet e voc'h gant ar saozneg atav, ne dalv ket ar boan eta lammat warnañ ken abred."

Ouzhpenn-se, e lavar an Aotrou **Le Moigne** bezañ chalet evel den, pa z'eo ezel eus F.O. e-unan.

Lizhiri evel-se a ziskoueze d'ar pennoù bras ne c'hellont ket lavarout forzh petra ken er bodadegoù foran. Laouen e vemp atav oc'h embann intrudu a-seurt-se gant hon lennerien.

SKINGOMZ

* Emañ Bernez ROUS, kelaouenner brezhoneg e Radio Breizh Izel e Kemper o paouez bezañ anvet pennkelaouenner e radio-France Picardie.

BREIZH HA RETER EUROPA

Plijet-bras eo bet strollad politikel an Emsav gant darvoudoù Reter Europa, diouz pezh hon eus gallet lenn en o c'hazelennoù : "Le Peuple Breton" (UDB), "L'Avenir de la Bretagne" (POBL), hag "Emgann".

UDB : Doujañs ouz ar minorelezhioù.

Evit UDB "eo deuet Roumania a-benn da seveniñ, en ur ober div sizhunvezh, pezh n'he deus ket gallet Bro C'hall ober dindan daou gantvobaz, da larout eo diazezañ Gwiniou Mab Den war re an hinienoù ha war re ar c'humuniezhoù war un dro."

Gwir eo ez eus bet embannet gant ar gouarnamant nevez e oa echu gant ar gwallforchañ ouz "minorelezhioù" ar vro. Ma wel UDB an traoù o wellaat evit pobloù ar reter dre vras eta ne lavar ger ebet avat, siwazh dimp Bretoned, diwar-benn o efed war he folitikezh.

POBL : KEVREADELOURIEZH... E LEC'H ALL, HA NEKET ER STAD C'HALL !

Kemennet en deus ar strollad POBL e oa ar broadelezhioù a oa bet e penn a-raok ar stourm evit an demokratelzh e broioù ar Reter (ha gwir eo evit Lituaniaz an URSS ha Magyared Roumania da vihanañ), hag e oant e penn kentañ ar stourm-se c'hoazh er C'hornaoueg, er stadoù a nac'h anavezout gwirioù ar pobloù.

Degas a ra POBL da sonj e oa bet Fañch Mitt en Hungaria o kanañ aviel ar gevreadelouriezh (*) evit "minorelezhioù" ar pobloù-hont, pa nac'h ar Stad C'hall benniget anavezout ar re zo bet laketañ dindan ar yev.

Gallet o dije tud POBL c'hoazh degas da sonj ouzhpenn eo prest Fañch Mitt da zegemer adunanidigezh Bro-Alamagn, daouet ma c'halle bezañ un anar evit ar peoc'h hag ar stabilidigezh en Europa. Arvarusoc'h c'hoazh e rank bezañ adunanidigezh Breizh evit ar

KELEIER

MINISTRED O TREMEN.

Edo **Joxe**, ministr ar Bolis, ha **Chérèque** och ober un droiad er vro dimeurzh diwezhañ (30 a viz Genver). Kemennet o deus e oa ar stad o vont da gemer perzh en "Institut Culturel Basque" evit 50% : 1,5 milion a lurioù gall a zeuz eus ministrerezh ar Sevenadur ha 500 000 eus hini ar Diabarzh.

Gwenneg ebet ne ro ar stad C'hall (nag he folis) d'hon "Skol Uhel ar Vro". Perak ETA ?



Loeiz MAHE

(*) Kevreadelouriezh : Federalism e saozneg.

Euskadi

AUTODETERMINAZIOA !

Manifestadeg vras a vo bet en Iruñea (Pamplona) d'ar Sul 11 a viz C'hwevrer evit an emsavelañ (autodeterminazioa, e yezh ar vro). E Breizh n'eo ket en em glevet c'hoazh hon strolladoù politikel d'ober hañval.

2 VLOAZ TOULL-BAC'H.

Kondaonet eo bet **Xan Koskarat** evit bezañ "kemeret perzh en ur genseurtiezh torfedourien" da 2 vloaz toull-bac'h ha 2 vloaz harlu eus Euskadi ouzhpenn. Kaset en doa **Xan** d'ar c'hazelennoù ur gemennadenn a-berzh ar strollad armet "Iparrarrak".

Ma vije bet **Xan** ur poliser anezhañ, ha m'en dije bet lazhet a daolioù bacz ur studier a onn maghrebat, evel **Malik Oussekin**, n'en dije ket bet muioc'h eget 5 bloaz gant goursez, da larout eo devezh ebet da dremen en toull.




LASTEZ NUKLEEL EN ANJOU ?

War-dro 15 000 a dud a oa o vanifestiñ en Anjers, d'ar Sadorn 20 a viz Genver, a-enep d'ur raktes douarañ lastez nukleel e **Bourg d'Irê** (nepell diouz Segré) en Anjou. Daoust e oa da embann o c'henskoazell dileuridi eus kornioù all a Vro C'hall, e-lec'h ma sav ar memes danjer, ha Bretoned eus ar C'harned, tost d'an Naoned, e-lec'h ma z'eus c'hoazh ur raktes a greizenn nukleel.

Gant ar vanifesterien e c'houlenn kannad UDF ar vro, a-gor gant ar gannaded eus Breujoù Strassburg **Didier Anger** (Re C'hlas Normandi), **Martine Buron** (PS, Kastellbriant) ha **Bernard Thureau** (PS Anseniz), e velle dilazel ar raktes. En em c'houlenn a reer avat perak n'o deus ket kondaonet an dileuridi a-gleiz hag a-zehou-se politikezh o gouarnamantoù o deus diorroet er c'hwec'hkom kreizennoù na lezont ket tra-walc'h a gaoch war o lerc'h, evit doare, peogwir e vez kresket c'hoazh ar bern gant moc'haj kaset gant broioù all, hag a dremen dre labouradeg La Hague.

Mark Kerrain



peoc'h hag ar stabilidigezh er Stad c'hall pa ne fell ket d'he renerien e vefe adstaget Bro-Naoned hag ar peder pemvedennoù all eus Breizh.

EMGANN : KENLABOUROMP !

Skrivañ a ra Y.P. e-barzh "Emgann" eo echu bremañ gant kredenn ar strollad nemetañ hag ar "greizennouriezh demokratel" he deus graet he reuz e Breizh re bell amzer. Poent eta, emazañ, stagañ da genlabourat a-benn bodañ an engrezoù a c'halle lakaat ar stad da bleagañ ha da anavezout hon gwirioù broadel. Kaarat komzoù, mar bezont heuliet gant oberoù.

Da c'hortoz ma vo savet ur c'huzul Broadel pe ur Forom Nevez breizhat bannak, diwar skwer broioù Reter Europa, hetomp ma vo kaset gant an holl strolladoù-se bagadoù niverus da gemer perzh e manifestadeg ar 17 a viz meurzh e Roazhon.

Loeiz MAHE

(*) Kevreadelouriezh : Federalism e saozneg.



PLOGO : 10 VLOAZ 'ZO !

Graet e oa BREMAÑ da vare stourm Plogo. Abaoe ez eus bet ur gwallzarvoud e Tchernobyl.

Skinwel / Skingomz

KEMM HA KLEMM

Eilpennet eo bet gant FR3 devezhioù an div abadenn treut a vez bezh sizhun en hor yezh.

KEMM EN EURIOU.

Setu bremañ eta "Chadenn ar Vro", un eurvezh ganti, d'ar Sadorn, e-lec'h "An Taol Lagad", un hantereurvezh hepken. Kemm e voazioù a ranko an arvester ober ? Ha neuze ? Pell 'zo en deus desket chom hep kaout hini, pa c'helli an abadennoù brezhonek bezañ lakat da forzh pet eur, n'eus forzh pe dre abeg, ha brav dezhañ c'hoazh pa ne vezont ket troc'het war zigarez marv ur c'hazetenner en ur gwallzarvoud (n'eo ket abadennoù gallek a vez troc'het ken aes).

Ha peadra zo da glemm, neuze ? Feiz, nann 'vat ! Nemet e vez skignet abaden ar Sadorn eus 1 eur da 2 eur (pa oa a-raok eus 12 e da 12 e 30) E-PAD AN ABADENN KLEMM GEMM NEMET A C'HALLER KLEMM E BREIZH PENN DA BENN (ha kaiz pelloc'h zoken !), "Du-mañ, du-hont" gant Mikael Baudu, eus kreisteiz da 2 eur. E-lec'h koll un hantereur abaden evel a-raok e vez kollet bremañ un eur. Trugarez da FR3 evit an nevezenti-mañ.

Ma z'oc'h ken plijet ha me e c'hallit kas ho kourc'hemennoù da rener FR3, baill Janvier 35000 ROAZHON.

HA NAONEDIZ ?

Met n'eus ket a-walc'h se. Gwashoc'h eo c'hoazh an traoù gant tud Bro-Naoned, a zo, evel ma ouzoc'h-holl, stag ouzh un euzhvil anvet "Peydeuloar" (ur rukun e zistagañ).

Abaoe 1988 ne c'haller ket arvestiñ ken e Bro-Naoned ouzh abaden vrezhonek ar Sadorn. Belek-hen e veze kollet un hantereur (hini "An Taol Lagad"). Bremañ, gant a c'hemm, e vez kollet un eurvezh penn da benn. Evit FR3 ivez n'eo ket Bretoned evel ar re all e tud Bro Naoned !

Klemm o deus graet un toullad Naonediz dija. N'eo ket tra-walc'h. Bech d'ho pluennou, lennerien ger !

Mark KERRAIN

SKINGOMZ : ABADENN EN ARVAR

D'ar Yaou kentañ a viz C'hwevrer eo'h embanna ur gazetenn (graet e gallek hag e Roazhon, evel a ouzoc'h) edo "Radio Bleue", skingomz ar re "50 vloaz" hag ouzhpenn, o vont da skingas hec'h abadennoù a-hed an deiz, pa ne rae c'hoazh nemet betek kreisteiz.

Kenket e komprenas lod eus selouerien "Du-mañ, du-hont", abaden sizhuniek Mikael Baudu, e oant o vont da goll an nebeud a vrezhoneg a c'heller klevout e Breizh Uhel (ha pelloc'h zoken), pa veze skignet an abaden-se d'ar Sadorn adalek kreisteiz (ha betek 2 eur), dre pa baoueze "Radio Bleue" war ar memes hider gwagennoù.

Pellgomz ha skrivañ zo bet graet raktel, hag a-benn ar fin eo chomet an trec'h gant ar selouerien hag an

abadenn vrezhonek en he lec'h. Evit ar poent bepred Hag un tamm mat a drugarez d'ar gannaded Cozann (C.D.S. Kastellin) ha Tramel (P.S. Lannuon) a-hervez. Met n'eo ket evit keloù-se ne vo ket klasket he skarzhañ kuit adarre diwezhatoc'h.

Ha n'eo ket evit se e ranker paouez da bellgomz na da skrivañ. Ur wech ouzhpenn e c'houiennomp digant lennerien Bremañ, ha dreist-holl digant ar re anezho a vez o selou an abaden-se, kregiñ en o fluad an larout da renerien Radio Arvorig ne c'houzañvint ket e vefe kollet an distarañ tamm eus an abadennoù ral a zo en hon yezh er skingomz.

(Radio Arvorig, baill Janvier, 35000 Roazhon, Pgz 99 30 22 44)

M. K



SKINWEL DEXTER NULIG KERNOA

Ken treut eo ar peurlin gant an abadennoù brezhonek er skinwel ma teu unan da vezañ figus. An deiz all e oan dirak ar skramm evel bep Sadorn evit sellet ouzh Chadenn ar Vro, an abaden nemeti en hon yezh. Kregiñ a rae mat ; Nolwenn he mouezh flour a oa o kinnig danvez an abaden : ur film polis hag Ullis 31. "Ur film polis e brezhoneg" a soñjenn "setu peadra da ziduiñ ar brezhoneger zo ac'hanon goude e sizhunvezh labour". Drant ha laouen e oan eta, soñjint : ur film polis e Brezhoneg ! Petra goulenm ouzhpenn ? Siwazh, disorc'henniñ a ris buan avat, pa wells penn Kernea war ar skramm. "Hemañ adarre !" a youc'his. Ken bihan-se eo bed ar Brezhoneg evit ma vezañ atav an hevelep re er skinwel !

Kernea, Georges Jouin, Ilig Meudec. Ma vent c'hoarierien vat

c'hoazh, ne lavarin ket, met allas... Tud nevez a oa er film, memestra, ret din anvav. Div c'hoar. Unan ne gomze ket, gwell a se. Met eben ! Klevet desket ganti dre evor 'm boe mi boan da ober. Ne oa ket echu gant ma drug-skouarn ; gouzañv Brezhoneg Montparnasse Georges Jouin e rankis ober ivez. Kernea, Dexter Furlig, polisier prevez mar plij, a bourmene e galite dre ruiou Montroulez e klask roudoù ur vaouez lazhet gant he c'hoar rak karantez o doa o div evitañ. Setu evit an istor : nul evel ar peurrest. Ao.Ao. Biennu, Kernea, Caiatari and co. ; ma z'eo ho pal koll arvestourien hoc'h abaden Chadenn ar Vro, kendalc'hit, war an hent mat emac'h.

Gwenael CARADEC

Taolioù pluenn



liv ar galloud ha dazont an Emsav

Bet m'eus bet tro da brederiñ un tammig bihan diwar-benn ar pennad embannet e barzh Nnn 100 BREMAÑ ha smet T.L.

Ma m'eus komprenet mat e vefe ar skrid-se rentañ-kont un emvod o defe kemeret perzh ennañ "un toullad tud eus an emsav sevenadurel". Etevlust eo afer ar berzhidi met memestra pa skriver e oa pal an emgav-se "studiañ degouezh hiziv ar gevredigezh vrezhek e-keñver e sevenadur ha klask an hentenoù da bleustrin evit hec'h amzer da zont", ne c'helli ket unan bennak chalet gant sevenadur Breizh chom hep lavaret e soñj diwar-benn an doare m'emeur o kompenn e endro hag e amzer da zont, pa ra T.L. ar gont eus an darvoudoù sevenadurel ha politikel e Breizh er bloavezhioù 70 pe 80 e hafval din iskis awalc'h ne vefe ket meneget en un tu bennak roll ha striv an UDB paneve evit tennañ kentelioù eus an istor. Kement-se a vir outañ a gaozeal eus strategiezh an tu kleiz unanet hag enframmadur an emsav rediet da heuliañ un hent dal politikel evit brasañ gonid ar Stad C'hall. Ne c'heller ket d'an soñj dispartiñ an dachenn sevenadurel diouzh an dachenn bolitikel dreist-holl pa veneger e-barzh an hevelep pennad "taolioù an FLE".

Marzus e kavan memestra e vefe o tizobin er bloavezhioù 1990 (n'eo ket re ziwzehat !) emañ amzer da zont ar brezhoneg ar c'harjou pa n'eo ket mui "intret-don war ar maez e Breizh Izel".

Ur goulenm a vroad ac'hanon ivez : pa veur kaoz eus an dilennidi e Breizh en deiz a hiziv, daoust hag eñ e vefe deut ar re-se "da harpañ ar storm pe da gemer ar penn anezhañ" diouto o unan ?

Daomp pelloc'h ! Petra a vefe dav kompren er c'homzoù-mañ : "n'eo ket mui d'an emsaverien da vont da c'houlenm o gwirioù da Bariz. D'an dud e karg, d'ar re zillennet, d'ar c'huzulour meur, d'ar c'huzulour rannvro hanterourien ar Vretoned e-keñver ar Stad" Souezhus a-walc'h e rankted neuze votiñ evit n'eus forzh pe strollad politikel gall a-benn reiñ "hanterourien" d'an Emsav. Daoust hag eñ emeur o tizobin da betra tlefe un dilennad servijout ? Daoust hag eñ n'eus ket riskl da vont davet ur "consensus" rannvroel, ar memes hini benn ar fin a rebacher outañ, an hent d'an "emsaverien da ren an aferioù politikel

e Breizh". Ur goulenm ouzhpenn : daoust hag eñ ez eo c'hoazh Skol an Emsav ur gevredigezh enepkapitalour ? (Daoust hag eñ e oa gwechall ha n'eo ket mui bremañ ?) Gant ur burzhud e vefe neuze troet ar plom en aour ! Setu, ma teuan a-benn da skoulmañ penn an neudenn, ne chomfe d'an emsav sevenadurel nemet un hent : bezañ skoazellat gant "hanterourien" nevez ar Vretoned hag ar galloudoù lecl'el ; ma n'eo ket ar c'ontrol : dont a rafe an emsav d'o skoazell, rak ne yafe ket ar galloud etre daouarn an emsaverien eveljust, setu e leuzent da vezañ "skoazellerien deknikel".

toullad tud" o klask dre ur skinhenn a c'halloud sevel ar gevredigezh "vrezhek" (?) gant dilennidi ar rannvro. Kenavo d'ar P.S. donedigezh vat da J.Y. COZANN !

Ur goulenm all c'hoazh : daoust hag eñ eo dal'chet ar sevenadur brezhoneg gant un toullad tud eus an emsav sevenadurel ? Meneger eo gant T.L. ar ganerien : Glenmor, Stivell, Servat. O lod o deus graet evit dihuiñ an emskiant e touz an dud hag e rañt c'hoazh mechans rak n'int ket bet sebet, m'eus an !



Derc'hel kont eus an dilennidi ha mont e darempred ganto a zo reizh met doujañ kement-all outo a zo mont un tammig re baill memestra nemet e klasker kas al labour da benn en o plas : dont da vezañ aktourien an digreizennañ (hep dilennañ eveljust natur an darvoudenn-se ha lakaat anat al liamm etre raktes De Gaulle e 1969 ha lezennoù ar PS e 1982). Setu vije achu eus an emsav evel nerzh politikel distag hag emren o pouezañ hag o c'h enebin, dont a rafe da vezañ afer "un

Hag ar ganerien, hag ar strolladoù a vremañ, daoust hag eñ e c'heller ijinañ e vefe c'hoazh anezho ? Keloù mat d'ar sevenadur ha pebez fizians en amzer da zont !

"Consensus" awalc'h eo ar saurt Breizh-z'eus bet kaoz anezhi moarvat : diouzh ar c'hiz eo eveljust ur goulenm diwezhañ ouzh T.L. : pesurt liv eo ar galloud ?

Per Vari KERLOCH



levrioù ha kelaouennoù

"FREIHEIT"

Kemennet ez eus dimp ganedigezh ur gazetenn nevez en Elzas **"FREIHEIT - Unsere Zukunft"** hec'h anv, a fell dezhi digeriñ un hent all **"en arbenn da gazetenn bemdeziek nemel ar vro na ro nemet sellboent ar prefed hag hini ministr an Diabarzh"**.
(An Alten Fischmarkt 7, EL-67000 Strassburg)

AR FALZ (NIV 67-68)

Ne oad ket kustum da gaout kement a vrezhoneg e-barzh **Ar Falz** ken : ur pennad-stur gant **Yann-Ber Kemener**, danevell Bodadeg Veur ar strollad (divyezhek), komzoù kanaouennoù ha kontadennoù ur filaj e Bro-Wened, ur pennad diwar-benn an doare-skrivañ, ur pezhig-c'hoari hag ur gemennadenn gant **"Emgleo Breiz"**. Kalz a skeudennoù hag a gemennadennoù a-hend-all. Meneger e vez levrioù nevez ha kazetennoù zo, ger ebet diwar benn **BREMAN** avat.

"Geriadur Istorel Ar Brezhoneg, rann 18 (Gwasanañ, Gwregel)" gant **Roparz Hemon (PREDER)**.

Ne chom mui nemet 8 levrenn da embann, met mar bez rei gortoz 3 bloaz evit pep hini ... e vo gwell d'ar re n'hallont ket tremen hep an oberenn-se kaout un tamm mat a basianted !

(Preder, 19 Park Maen Meur, 29700 PLOMELIN)

"Pour un droit des peuples", gant **François Rigaux** (184 fajenn, 103 lur, 98 ar rak-prenañ) zo ul lev'r da zont er-maez a-benn ar 15 a viz C'hwevrer gant **"Chronique Sociale"** (7 rue du Plat, 69288 Lyon Cedex 02). Bez e vo an embanner e Gouel al Lev'r, en Naoned, eus ar 1añ d'ar bevar a viz Meurzh.

KLASKERIEK VARA AR PARDONIOU

Setu ul lev'r bannoù treset nevez kinniget deomp gant **KEIT VIMP BEV** : **"Klaskerien vara ar Pardonioù"**. Ul lev'r bannoù treset ouzhpenn marteze, met disheñvel mat diouzh ar re all bet graet a-raok, rak heñañ n'eo ket un droidigezh ha n'eo ket kennebeut un dresadenn e gwenn ha du. Ur gwir lev'r bannoù treset e liv hag embannet e brezhoneg da gantañ, ken kaer eo an tresadennoù ken ne vefe ket souezhus ma vefe troet e yezhoù all da c'houde.

Yann Vikael LICHOU eo an oberour, un dorn a ziskouez bezañ donezonet koulz evit pezh a sell ouzh an tresañ, al livañ hag an doare da frammañ e vannoù treset.

Kaset omp gantañ da Vreizh ar c'hantved tremenet e-touez an dud vihan a oa eus ar glaskerien vara, tud o doa o flas er gevredigezh, evel ar

foeterien vro all, pilhaouerien, marchadourien gezeg e oant skingomz ar mare-se.

Gouezet en deus **Yann Vikael LICHOU** taolenniñ ar bed-mañ en un doare dispar.

Laerofis, gwad o redeg, ne ender ket kennebeut o lenn an istor.

Y.P.

Al lev'r-mañ ne vefe ket deuet er-maez hep sikour mignoned, hep ar skoazell d'ar c'hrouñ roet gant ar **C'huzul Rannvro** hag ar **C'huzul Departamant (28)**.

Embannet eo bet e brezhoneg gant **KEIT VIMP BEV** hag e galleg gant **COOP BREIZH**. Lakaet eo bet al levrioù e gwerzh er gjalioù (65 L). Tu 'zo da gaout anezho ivez dre ar post (75 L), en ur skrivañ da **KEIT VIMP BEV 29250 LAZ**.



KEMENNADENN

E ti **KANEVEDENN, Kreizenn Brezhonegerien Brest**, 21 straed inkermann :

-d'ar **Gwener 16 a viz C'hwevrer da 8e30** noz e vo un diviz war ar varzhoniezh vrezhonek a-vremañ kaset en-dro gant **Alan Botrel**, skrivagner ha

kelenner brezhoneg, karget a gentelioù e **Kevrenn Gallek Skol-Veur Breizh-Uhel e Roazhon**.

-d'ar **Gwener 23 a viz C'hwevrer da 7e30** noz e vo ur pred krampouezh. Pellgomz da lakaat hoc'h anv a-raok ar **Merc'her 21** d'an niverenn **98 80 72 03** pe **98 05 21 17**.

BLUES KOMZET BARZHONIGOUGANT GWENDAL DENEZ

Gant fin ar bloaz tremenet e kinnige deomp **Mouladurioù Hor Yezh** un dastumad barzhonigoù gant **Gwendal DENEZ - BLUES KOMZET**.

Anavezet mat eo **Gwendal Denez** evel barzh, gant lennerien ar c'helaouennoù brezhonek. Setu amañ ouzhpenn 60 barzhonigoù, skrivet e-doug ar bloavezhioù, darn a zo bet embannet dija, darn a vo lennet amañ evit ar wech kentañ.

Awenet e vez **Gwendal Denez** gant daou dra disheñvel a-grenn hag a gaver a-hed e skridoù : ar mor hag ar gêr vras. Ya, ar mor, war drazhenn ar **Ri e Douarnenez** en deus tremenet e vugaleaj ; ar gêr vras, Roazhon, emañ o vevañ enni abaoe 15 vloaz. Komz a ra deomp, en ur yezh pimviek-tre, eus ar vuhez er c'hêrioù didruez, eus an dud-se ha n'anavezomp ket evit gwir, kaset ma z'int gant red ur stêr a lonk hag a zistruj anezho.

Modern eo an ton, hep arouezioù poentaoùñ alies. Gouzout a gar lennañ ur seurt kenred diouzh un danvez euzhus, evel e

roazhon blues

eus penn uhelañ savadur an tailhoù eo lammet an den ha kouezhet eo war ar ribienn — triket — ken na stinkas e empen war ar c'hirri harpet dirak penn izelañ savadur an tailhoù

Komz a ra ivez **Gwendal Denez** eus ar garantez, gant gwerzennoù frommus ; eus ar marv a zo evitiañ ur perzh eus ar vuhez, un neudenn hag a heuilh achanomp adalek ar c'havell betek ar vered-ha merzet hoc'h eus ne varv mui an dud an deiz a hiziv ? "mont a reont kuit" ... da belec'h ?

BLUES KOMZET embannet gant **Mouladurioù Hor Yezh**

KARTENN AR C'HWEC'H BRO KELTIEK

Embannet ez eus bet ur gartenn e liv eus ar 6 bro gallek, treset gant **Jakez Derouet**. Douet eo mat-tre gantañ : moulet eo bet gant pevar liv, hag arlivioù a lak kemm etre ar rannvroioù : eskoptioù kozh Breizh, koteleshoù Iwerzhon h.a. Kavout a reer warni anvioù ar c'hêrioù brasañ, ar menezioù hag ar stêrioù pennañ... ha kement-se holl ar yezhoù keltiek "nemet e-lec'h ma n'eo ket bet komzet biskoazh ar yezhoù-se gant ar bobl eme **J. Derouet**, da lavarout eo en ul lodennig eus rater Breizh-Uhel hag un tamm eus gevred Izelidriou Bro-Skos e-lec'h ma kaver stummoù divyezhek ; brezhoneg ha galleg pe saozneg ha gouezeleg.

Daoust m'eo stank a-walc'h an anvioù lec'hioù e chom helenn-tre ar gartenn. Tro-dro dezhi e kaver, war 4 bann, stummoù saoznek pe c'hallek an anvioù a-geñver gant o stummoù keltiek ha gant lec'hioù. Lakaet eo bet **Galizia** hag **Asturias** war ar gartenn ivez, met displeget fraezh eo petra int : broioù romanek o yezh gant un emskiant keltiek. Bez' emañ ivez kartenn ar **Chubut** hag hini **Nova Scotia**, trevadennoù kelt en Amerika.

Traougoù da rebech n'eus ket kalz

-chomet eo un nebeut viou-koukoug siwazh (**Caergby** da skouer e-lec'h **Caergby**)

-perak bezañ dibabet **Celtica** (gantañ stumm un anv-gwan) da daiben ? Gwell e vefe bet moarvat ober gant **Celtia**, pe **Keltia**.

Met kement-se ne ziafe ket mirout ouzhoc'h d'he frenañ : 100 lur hepken er stalioù, pe 110 lur dre ar post digant **Skizell Vreizh**, e ti **P. Loguet, Poull ar Feunteun, 29480 Ar Releg**.

Lennit al liamm
Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud dilabour : 100 lur)

Dalc'het e vo **KENDALC'H KELTIEK ETREVRODEL 1990** e **ABERTAWE**, eus an 30 a viz Gouere d'ar 4 a viz Eost.

Danvez ar C'hendalc'h evit ar bloaz-mañ a zo : **AN ARZOU HAG AR BROIOU KELTIEK**.

Ur genstrivadeg evit ar re yaouank etre 18 ha 25 bloaz, a vez aozet gant **SKOURR BREIZH** ar C'hendalc'h da gefiver an emvod-se.

Bez e ranko ar genstriverien kinnig ur studiadenn a 10 pajennad skriverezel e brezhoneg diwar-benn **AN ARZ KELTIEK E BREIZH AN DEIZ A HIZIV**. Al labourioù a zo da vezañ kaset, evit an 30 a viz Mae 1990 d'an diwezatañ, da **KENDALC'H KELTIEK**, Gwaremm Leurven, 22310 PLUFUR.

Digoust e vo **KENDALC'H ABERTAWE** (beaj + ar 5 devezh kendalc'h) evit an hini a c'hounezo ar genstrivadeg.

KEMENNADENN

Bez' emañ embannadurioù **An Here** o klask :

un TUC, paotr pe blac'h, ur stajad(ez) SRA, hag un arbennoù a ouffa un tamm bennak a vrezhoneg evit ober labour burev e Brest, evit ar Geriadur Holivrezhonek. Stummet e vint war ar brezhoneg ha war ar skriverezañ.

Skrivañ pe belgomz da :

AN HERE
9 straed Kerfautras
29200 BREST
98 80 72 03

A-BERZH HOR EKSPERT A VANNIELOURIEZH.

Da geñver Kalanna ez eus bet gant ul logo nevez evit **Tréguex** (e gevred Sant Brieg), kinniget evel "un arouez boutin dreist-ordinal, krevñ ha dibar evit an holl Dregeuzianiz", o lakata da dalvezout hepken al lizherenn T a zo hini gantañ ar gumun, o'h aroueziañ krouzherent ar RN12 gant ar CD700 (!), kement-mañ livet e gwenn war ur foñs glas evit ma war-raok da gaout berzh.

D'am soñj, e c'hellio an ajañs **Aedificandi** (n'am eus ket gallet he lec'hiañ) kinnig an hevelep hin da di-kêr Trifouilly-les-Oies; marteze e c'hellfant cheñch al liv evit ma ne vele meskañ ebet.

Ar pezh a vantr ac'hanon ez eo e vez rediet an dud da c'houzañv muoic'h-muiañ hevelep logoioù pennlizherennek a zie bezañ ken "poblek" ha brudet ma roer diouz ret an "droidigezh" *in extenso* evit ma c'hellier o c'hompren; kement-mañ n'en deus ster ebet e-keñver arouezouriezh.

Ouzhpenn-se, perak kaout c'hoant da nac'hañ e wrizioù ? Piv a gredfe lemel digant ar Vretoned hor erminouigoù hollvrudet ? Lod o deus esaat, met hep ober berzh da vat na c'houlennit ket diganin ad-tresañ ar skouer diwezhañ, peogwir ne dalvez ket ar boan.

Evel-heñ, perak he deus dispartiet Kêr Roazhon diouz he "palé au Chef d'Hermine" ("palé" a zeu eus ar galleg "palisade"), a arouezie anezhi evel "Chef des Hermine", da lavarout eo kêrbenn gwarezius Breizh, evit mont da zibab ul lizherenn R kevrinnus, gwer ha skeudvarenek doare informatek ?

Perak eo aet "Lorient" d'en em ziskouez gant al lizherenn L e stumm ur wagenn, padal e vefe bet gwelloc'h dibab an O, ma vefe bet sirusoc'h ar grouerien e-pad an enklask.

N'on ket tamm ebet a-enep ar voderelezh e-keñver aroueziañ, met an holl "gadjedou sevenadurel" se a zo berr-tre o amzer da vevañ, evel an embregerezhioù kenwerzhel a zie cheñch o skeudenn dibaouez pa gosha houmañ re vuan.

Deoc'h-c'hwij, tud an tiez-kêr, ha Kuzulioù a bep seurt, hag a soñj deoc'h

dont da vevañ brudet mat en ur rediañ an dud da zegemer arouezioù n'int ket anavezet, deoc'h-c'hwij da c'houzout :

1 -ne gaver ajañsoù "design" ha keneskemm nemet evit gwerzhañ deoc'h gadjedou ha gounid arc'hant diwar ho chouq, da lavarout eo, diwar hor c'houst.

2 -ne dalvezto morse al logoioù a baeit ker-ruz kement hag un arouez kozh a vil bloaz a-wechoù hag eo stag ar boblañs a-bezh outañ an he c'halon.

Da skouer, goude bezañ bet difenet e-pad 45 bloaz, eo deuet en-dro e gurunenn war erer Polonia gant levnez ; ha marteze ec'h adwelimp bremañ en-dro tri leonpard Estonia, kroaz doubl Slovakia, h.a.

Trugarez d'al lennerien a c'hellfe degas skouerioù all din, mat pe fall, eus Breizh pe eus lec'h all.

Alan RAULET
Kombost postal 427
22700 SAINT BRIEG



FESTOÙ-NOZ ER VRO...p.20

KELEIER KENVREURIEZH SANT ERWAN.

LEVRIG AR C'HRISTEN

Kendarc'hel a raer da werzhañ al levrig tamm-ha-tamm. Tu a vije bet d'ober muoic'h a vruderezh marteze, mel kontet am boa dreist-holl war ar parrezioù. Er-maez eus ar strollad "Belelen e Breizh" avat, n'eus ket bet gwerzhet kalz er parrezioù. N'eo ket

keleier

dedennet-tre ar veleien gant ar brezhoneg dre vras, ha nebeutoc'h c'hoazh gant al liderezh e yezh ar vro. Lizherioù trugarokaat am eus bet digant Eskibien Kemper ha Gwened.

KRISTENIEN BREIZH

Dalc'het eo bet ar vodadeg miziek e presbital **Plouneour Menez** d'ar Sador, Sul ha Lun 27, 28 ha 29 a viz Genver, ar re yaouank hag an dud en oad a-gevret d'ar Sul. Un daouzek bennek a oa eta, pezh a zo kalonekaus. Ret eo mont war-raok c'hoazh.

AN NIVERIDEGEHZ

E 1990 e vo graet un niveradeg evit kentañ an dud, o ziez, o ferc'henniezh hag all. Goulennet ez eus bet gant strolladoù sevenadurel lakaat ivez ur gouleñn e Breizh evit gouzout pet a dud a oa, a gompren pe a gomz brezhoneg. Nac'het ez eus bet gant an INSEE betek-hen prientiñ an enklask-se, hep abeg gwirion. Strolladoù 'zo o deus gourdrouzet aozañ ur boikot eus an niveradeg. Meur a stumm a zo d'ober, da skouer respont n'eus forzh petra d'ar gouleñnoù.

BODADEGOÙ DA ZONT

Gant Kristenion Breizh, Belelen e Breizh, Emglev an Tiegezhioù : ur vodadeg evit ar familhoù a vo dalc'het e Rostren, d'ar Sul 8 a viz Ebrel, e skolaj Kampostel. An ofernenn a vo lidet e diwezhañ armoù. Graet e vo war dro ar vugale, hag an dud vras o devo ur brezegenn. Ur valeadenn a vo graet holl a-gevret.

KAMP KATEKIZ

Dalc'het e vo e Rostren eus al Lun 6 betek ar Sador 11 a viz Eost. Degemeret e vo vugale eus 7 bloaz betek 14. Ret e vo bezañ brezhoneger, barrek da gomz ar yezh en holl zegouezhioù, rak warlene e oa un nebeut gallegerien e touez ar vugale a lakaer ar re all da c'hallegiñ d'o zro, pezh a laka hor pal da c'hwitañ evit un darn.

Yann TALBOT Presbital Rostren

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59. Hent kerdronioù
Vihan 29000 KEMPER

Koumanant bloaz : 100 lur
skoazell adalek 130 lur

kenstrivadeg

KANAOUENN AN DRASK SAVET GANT KAN AN DOUAR E LANDELO D'AR 1Añ A VIZ EBREL. REOLENNOU AR C'HONKOUR.



1-Ur son da zañsal, kanet e **Kan ha Diskan** (gavotenn, fise!, plinn ...) war an ton simpl pe war an ton doubl / tre 15 ha 20 poz. un tamm-kreiz / tre 6 ha 10 poz.

AN DIBAB A VO GRAET WAR AN DIV SON EVIT AR C'HONKOUR.

2-Ar sonioù a rank bezañ nevez-savet, ha n'int ket bet o konkourañ e lec'hioù all a-raok.

3-3 friz evit sevel ar sonioù (composition). 3 friz evit ar ganerien a gano ar sonioù nevez-se (interpretation) 5000 lur a prizioù (arc'hant ha profoù).

4-An dud a zavo sonioù hag o deus c'hoant da konkourañ evit kanañ, zo aotreet dezho da konkourañ div wech. (composition-interpretation).

5-Evit ar c'honkour kanerien (interpretation), ouzhpenn an div ganaouenn nevez, vo ret kanañ ur ganaouenn gozh, kuit da "zlostañ" an dan (tamm kentañ, tamm kreiz, ton doubl).

Ar barner (jury) na zibabo nemet war an div ganaouenn nevez, da larec eo un ton simpl pe un ton doubl hag un tamm-kreiz forzh penaos.

6-An dud a zavo sonioù vo ret dezho kas o skridoù da "Kan an Douar", Presbital kozh, 29261 LANDELO arak ar 15 a viz Meurzh, diwezhañ dale.

7-D'an dud-se da larec mar kanint o-unan ar ganaouenn, pe get.

8-Ar memes den n'eus droid da sevel meur a ganaouenn.

9-Ar ganerien o deus c'hoant kaout komzoù ar sonioù a rank skrivañ da "Kann an Douar", Presbital kozh, 29261 LANDELO, arak ar 15 a viz Meurzh.

10-Da bep kaner a raio ar gouleñn vo kaset dezhañ en ur wech, an holl sonioù savet, dezhañ d'ober e choaz en o zouesk.

GERIOU-KROAZ GENVER 1990

I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1	T	O	M	H	E	O	L	I	G
2	A	N	O	U	E	D	E	S	A
3	E	N	A	S	K	A	N	K	E
4	R	E	N	K	N	A	E	R	
5	A	N	A	M	O	R	I	N	
6	A	N	A	D	E	N	N	V	A
7	T	L	I	K	O	E	Z	O	
8	D	I	G	A	R	G	T	U	
9	A	L	E	A	D	A	R	R	E
10	F	E	R	E	T	N	O	A	Z

gant F&C'H.

geriou-kroaz miz C'hwevrer 90

- A-LED
- 1. Kalet eo frouezh ar gwec-mañ.
- 2. Evit envel un den - Touadenn.
- 3. Askell gorreok amprevaned 'zo.
- 4. Anv bihan gourdel.
- 5. Etre Logonec'h ha Roc'han - A rollo oksegen.
- 6. Lodennoù tanvay un danvez.
- 7. E-barzh - Riklañ.
- 8. Ha neuz.
- 9. Anv d'an draonienn - Gwrinnenn.
- 10. Kerdin moan - Stuma.

- A-BERZH
- I Hegarat
- II Donezon - Un ebeul tregariat a c'rin - Raganv.
- III Un taol-daeañ - Etre ar gwizliad hag ar skourrou.
- IV E-giz hoar - Touadenn.
- V. Unan e-kichen Baeleg-Perez, unan all e-kichen Pondi - Beleg.
- VI Enezenn - E-barzh.
- VII Kreatenneg prizec mat.
- VIII "Dont er bed" evit ur wazh.
- IX A-dreñv da bav ar c'hoag - Kêl'chioù
- X. Kouezhañ a reont bep bloaz - Obererezh mab-den hepken.

I	II	III	IV	V	VI	VII	VIII	IX	X
1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

BREMAN NIVERENN 101

MIZ C'HWEVRER 1990

TAOLENN

Lizhiri.....	2
Niveridigezh.....	3
Enklask Insee.....	4
Enklask Insee.....	5
Manifestadeg.....	6
Dazont/USB.....	7
Diwan Kemper.....	8
Deskadurezh.....	9
Gouleier ar bed.....	10-11
Keleier Breizh.....	12
Keleier Euskadi.....	13
Skingomz-Skinwel.....	14
Taolioù pluenn.....	15
Levrioù.....	16
Keleier.....	17
Keleier.....	18
Kenstrivadeg.....	19
Kemennadennoù.....	20

Ar pennadoù gant R. Baxter, Burev Europa, T.L., Tudgal Kalez/UGB, Riwall ar Menn Anna Vari Ar Rouz, Loeiz Mahe, Mark Kerrain, Jil Killevere, Gwenaél Caradec Per-Vari Kerlorc'h, Y.P., I.K., Alan Raultet, Yann Talbot, F. ar C'hordroc'h.

Tresadennoù gant Malo Louarn, Nono, Y.V. Lichou.

Luc'hskeudennoù gant A.V. ar Rouz, Tangi Louarn, O.F., Lena Louarn.

Maketenn gant J.M. Roynard, Nolwenn Louarn, Lena Louarn.

Skoazell Noela Olier, Lao-rañs Motrot.

RENER BREMAN Mikael Baudu
Bremañ 8 ru Hoche Roazhon

EVIT NIVERENN A ZEUBREMAN : kaset ho pennadoù, keleier, kemennadennoù, tresadennoù, luc'hskeudennoù (ober ar reont diwer deomp alies !) A-RAOK AR SUL 4 A VIZ MEURZH ! Trugarez vras deoc'h!

notennit

war ho teiziataer...

D'AR 15-16-17 A VIZ
C'HWEVRER 90,

Kamp Etrekeltiek ar
Vrezhonegerien

Unvaniezh ar Gelenne-
rien Vrezhoneg

Ar Falz

Skol Ober

Skol an Hanternoz

Skol an Emsav

a ginnig deoc'h

**3 DEVEZH-STUDI
WAR AR BREZHO-
NEG**

Studiañ donoc'h hon yezh,
peseurt doareoù kelenn?

en Oaled TREGLOU.

Pg. 98.04.07.04


FESTOU-NOZ ER VRO !...

-d'ar Sadorn 10 a viz C'hwevrer e
Peder neg gant **STORVAN, FEON** ha
LEHART, ROBIN hag **AN INTAÑV,**
LOUARN ha **THOMAZ, ROUSVOAL**
ha **TEXIER** (evit **DIWAN**).

-d'ar Sul 25 a viz C'hwevrer e
Gwengamp, er Greizenn Roparz
Hemon, adalek 14e30 (Fest-deiz eta!)
Gant : **Youenn PERON** hag **AR MOAL,**
Marius ha **MOC'H GOUEZ, BOZEG** ha
VIGOUROUS.

-d'ar Sadorn 31 a viz Meurzh e
Peder neg gant **STROBINELL, Bernard**
LASBLEIZ, ROBIN hag **An INTAÑV,**
PERON hag **AR MOAL** (evit Unvaniezh
ar Gelennerien Brezhoneg).


... plijadur a zo !



RADIO-BRO
RADIO AR VREIZHIZ E PARIZ 88.2
MHZ

**PROGRAM MIZ
C'HWEVRER 1990 D'AR
GWENER DA NOZ**

8e-Kinnigadur program an
abardaevezh ha sonerezh. 8e30
Pennad-stur gant Serj. 8e35 **Keleier**
(brezhoneg ha galleg) displeget gant
Maï ha Serj. 9e **Mesk-divesk** (keleier
sevenadurel, c'hoarioù...) 9e45 E-pad
ur c'hardeur ez eus tu da gas
kemennadennoù da Jilbert Kabon dre
hanterouriezh Radio-Bro. 10e "**Breizh
Hiziv**", magazin (d'an 2/03 : ar
C.U.A.B., d'an 9/0: "**Mojenn an Ankou**",
ur studiadenenn diwar-benn Anatol Ar
Braz gant Dominig, d'ar 16/03 : Magazin
ar brezhoneg gant Serj Richard :
pennad-kaoz gant ar strollad rock
brezhonek : "**The New Dazont**", d'an
23/03 : **Ekonomiezh** gant Yann Fievet).
11e **Sonerezh pe gonchennoù** (d'an
2/03 : "**Derrière de chez mon père**", d'an
9/03 : **Sonerezh gant kelc'h keltiek**
Sartrouville, d'ar 16/03 : pedervet
lodenn "**Marion ar Faouet**" gant
Gwendal ar Floc'h, d'an 23/03 :
abadenn sonerezh kaset en-dro gant
skipailh Radio-Bro).



FILMOU EUS EUSKADI

Tu a zo da gavout e Breizh filmoù
video savet en Euskadi diwar-benn ar
stourm politikel er vro-se. O goulenn a
ranker digant "**Canal 56, 21 rue de
Carmel, 56100 An Orlant**".

E-touez ar filmoù e gwerzh ez eus
lod diwar-benn ar stourm evit an endro
(**Lemoniz, Eguzkl**), an istor (**Gernika**)
hag ar gwaskerezh.

DEIZIATAER

PREZEGENN
E SANT-BRIEG

E Sant Brieg, d'ar Sadorn 24 a viz
Meurzh da 2e30 en Oaled Abherve :
"Ar Broadoù hep Stad en Europa" gant
Yann Fouéré.

STAJ BREZHONEG

D'ar Sadorn ha d'ar Sul 10 hag 11
a viz Meurzh e vo dalc'het ur staj
brezhoneg komzet er **Chapel Nevez**
(etre Gwengamp ha Kallag), aozet gant
"Skol an Hanternoz". Digor eo d'an holl
re a fell dezho deskiñ pe peurzdeskiñ ar
yezh.

Dre rummadoù e vo rannet ar stajidi
hervez o live.

Kregiñ a ray ar staj d'ar **Sadorn
beure da 9.00 eur** hag echuiñ d'ar Sul
d'abardaez.

50 lur e vo priz an devezh (Gwele
25 lur, merenn 35, koan 30, lein 5).

Evit lakaat hoc'h anv (a-raok an 3 a
viz Meurzh) pe evit kaout
diskleriadurioù ho po da skrivañ da **Jef
Philippe, Koad ar Roc'h
Bihan, Koadoud, 22970
PLOUVAGOAR**

KINNIG LABOUR

**A.E.P. DIWAN BRO-
NAONED
SKOL DIWAN NAONED**

A zo o klask ur **SKOAZELLER(EZ)** a
gomz brezhoneg, dedennet gant
labourat war-dro bugale yaouank (2-7
bloaz).

-Mat e vefe kaout ar **B.A.F.A.**

-27e30 bep sizhun.

Ul lizher en em ginnig da gas da
z**DIWAN**, 3 straed Harrouys 44000
NAONED.

GOULENN LABOUR

Brezhoneger o klask labour, tu da
sinañ ur **C.R.E.** (pe kontrad distro d'al
labour), gounidus evit an implijer. Evit
goulenn titouroù pellgomzit d'an **98 99
96 03.**